

REGIMENT Ar Merc'het Yaouank

VAR EUN TON GALLEC

1^e Couplet

Breman me meus clevet
Vo gret eur régiment
En hini vo choaset
An oll merc'het vaillant,
Da vont ober[!]brezel
Var an ennemiet;
Betek vo red mervel,
Vefont fidel bepred.

Diskan

Paseet merc'het, vaillant.
Breman er bragou[!]ru
Da vont d'ar régiment,
Vefet galvet dustu.

2^e Couplet

En plas ho robeniou
Danves deus ar c'haera
C'hui a po eur bragou
Deus mezer ar grossa
Hag a dre ho corsous
C'hui po centurennou.
Ho taoulagat [l]irzin
Oute neuze vrillo.

3^e Couplet

Ho bleo hir a pentet
En demesellet coant,
Breman a vo troc'het,
Vel guir soudard vaillant,
Ag en lec'h ho coeffou
C'hui po casquetteennou.

A deo cocardennou
Ag ive eur ponpon.

4^e Couplet

E plaç ho potinou
C'hui po eur boutou gros,
Vit heuil an armeou,
Coulz en de vel en nos
Evit euu em c'holo
A po eur gapoten,
Onney vad d'ec'h rayo
Pa vo en amzer yen.

5^e Couplet

D'eus ar merc'het coanta
Certen e vo choaset
Er c'hargou huella
A da gapitainnet.
Ar re guisket mad
A vo er buroyou
Eno velfont ervad
O c'heuil an armeou.

6^e Couplet

Ar merc'het teo a lard
Vo er gavaleri
Ac an oll verc'het stard
Vo en eur artilliri,
Vit gallou remui
Ar boullijou canoliou
D'ober d'an ennemi
Cals tennou boullijou.

7^e Couplet

Ag ar broderezet,
Vo er voltigerien,
Ar guemenerezet
A vo bars e linen,
E chassourien var droad
Vo ar merc'het a gramp,
B'lamour in délicat
Ag eur voues elokant.

8^e Couplet

Da vont en hussardet
Ar gueguinerezet,
Ebars an dragonnet,
Vo ar wal'herezet ;
Merc'het ar pinsonniou
E vo er zoafet ;
Ar butun so kelou,
Vo en infirmierezet.

9^e Couplet

En infantiri marin,
Ar baperezet
Er c'honseil disciplin
Ar re deo meritet,
Da vont er saperien
Ar merc'het terrupla.
Evel coz archerien
A vo er pen kenta.

10^e Couplet

Penn ar régimenchou
Breman e vo laquet
Gant an tamboulinou,
Ar guir everezet
Ag ar stamerezet,
A zo er c'hlaironniou
Dre mint corfou ezet,
Eu pen deus an troupou.

11^e Couplet

Vit son ar musikou
Ar groampoerezet
En heuil an arineou
A vo prob da welet ;
Ag en ostizezet
Gant ho ardou malin,
A vo cantinerezet,
A werzo dour vit gwin.

12^e Couplet

Cetu aze, merc'het,
Evidoc'h eur c'helou
Cals ac'hanoc'h, me gred,
A vo trist ho guinou ;
Pa vo red d'ec'h monet
Da hueil ho bataillon
Bezit fidel bepred
Evit an natioii.

CHANSON NEVEZ

DAOU DEN YAOUANK DEUS A GEAR MONTROULEZ

VAR EUN TON GALLEC

Ar goas

Bonjour va douz, va c'harentez,
Deut hon gant gwir humilite (bis)
Da lavaret dit kenavo
Hon deut aman (bis)
Da servicha an drapo,
Mont rankan breman.

Ar plac'h

Oh ! Louis va muia karel,
Mervel a rin gant poant speret
Assembles ganit breman,
Me a ielo (bis)
Birviken did ne vankan
Beteg eur ar maro.

Ar goas

O ! Marivon, va dousik, coant
 Te ne deui ket d'ar regimant,
 Cals a dourmanchou
 Zo er brezel, (bis)
 Bars en touez ar soufranzou
 E teufes da verval.

Ar plac'h

Ma veze red din brezeli
 Me rofe plom d'an ennemi,
 Me ziscoefe va c'hanouliou
 E creis an tan (bis)
 Vin ket plac'h treitour na lach
 Da denna ar Prussian.

Ar goas

Va mestrez ker, e kreis an tan
 Evid eur plac'h so re a hoan
 A gant trous ar c'hanouillou
 Teufes bouzar (bis)
 A gant ners ar mitraillou
 E couefes d'an douar.

Ar plac'h

Ma ne c'han da vrezeli,
 Da renta fas d'an ennemi,
 Me a vo cantinieres.

Er regimant (bis) ;
 Me ranko mont ganez,
 Evel gwir plac'h vaillant

Ar goas

Neuze ta, va douç Marivon,
 Ec'h efomp on daou
 Ben e nebeudic amzer
 Gant gras Doue (bis)
 Nin a retourne d'ar gear
 D'or bro ha pep contre.

Partiet in d'ar regimant
 O daou gant eur galon gontant
 Da servicha an drapo
 In partiet in partiet
 A beteg eur ar maro
 Vefond fidel bepred.

Cetu aze, va mignonnet,
 Daou den en em garie parfet
 O ia bars an honestis
 A barfadet, a barfadet
 Gret evel ar yaouankis
 Bezit fidel bepred.

EUN DIMEZI GRET GANT AR VAM

VAR TON : ROSET

Ar vam

Eru eo ar moment
 Va merc'h, ret eo dimezi
 A da sonjal breman
 Petra peus d'a ober
 Da dimezi breman
 D'an amzer prezant.

Ar Verc'h

Va mam ne gomzit
 Din c'hoas deus a zimezi (bis)
 Re yaonank hon c'hoas
 Da vont da ren ar bed
 Ne meus n'emem c'houzec vloas
 Dimezi na rin ket.

Ar Vam

Va merc'h, sent diouzin
 Rag ma quittaïn ar bed (bis)
 Gant aon em goudet
 E neur gafes tromplet
 Ag ar rest ar vue,
 Malheurus var ar bed.

Ar verc'h

C'hui ne noc'h quet prest c'hoas
 Va mani, da zont dam c'huitat,
 Ben nebeut blaveziou (bis)
 Vin muioch avancet
 A ben fin ho teñø,
 Me a mo va choas gret.

Ar vam

Va merc'h, eun den yaoank
 A so demeus da c'houlen
 A so den a zoaré, (bis)
 Hervez ma seblant din,
 A deus a gualite,
 Kemer n'hean hardi,

Ar verc'h

Va mam en ho cosni,
 Ne glean ket ho refus,
 Ma ran eur barti fall (bis)
 Neur glem na rin biken ;
 Mez c'hui deut da zioual,
 Ne pe goude anken.

Ar vam

Va merc'h, me en assur,
 Deus ar pez a meus laret
 Gant henes, vi contant (bis)
 Tre ma vi var ar bed ;
 Dimez hep nec'hamant,
 Bara dib vako ket.

An' dimezi

Cetu'ta dimezet
 Ar plac'hic gant he mam
 D'an oad a c'houzek vloas (bis)
 Da vont da roul ar bed
 V goude petra re c'hoas
 Allas ! ne ouie ket

Ar plijadur

Eur pennad e zin bet
 O veva gant plijadur (bis)
 Siouas, an vrusted ;
 Ar pez neo ket padus
 Rag emam e deus bed
 Eur pen gwel dangerus.

Ar dizesper

Ouspen meo, didalve
 Eo sur ive, bambocher (bis)
 An arc'hant a chone
 An dro par an zizun
 A vez louket en eun de.

Ar guel Vue

Pa neur gav c'haes or ger
 E commans d'ober bue
 Tollet a distollet (bis)
 Alies bazatet
 Cetu aze ar vue
 Zo entre daou brie.

Ar vam desolet

He mam pe deus gwelet
 Ar vue voa entrezé
 A zo bet desolet
 O velet he doa gred
 Malheur er merch caret,
 Tre vije var ar bed.

Avis

Choui, tadou a mamou.
 Ne re ket evel homan
 Ne dait ket da bressi (bis)
 Dimei ho pugale
 Gant aonn evelti
 O pefe keus goude.

Lesit ho pugale
 Ho heund'ober ho]choas
 Pa eo int rank usa (bis)
 Eo just dezo c'hoas ive.
 Ma ne larit netra
 Vefet divlam goude.